

IMBOUREC'H

30 Gwengolo 1972

Niverenn 33

IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

Trede bloavezh

Niverenn 33

30 Gwengolo 1972

Dazont ar yezh.....	p.193
Bodadeg vloaz ar C'hevre keltiek.....	p.203
Sokialouriezh ha frankzouriezh : degouezh Chile.....	p.207

Ar pennadoù embannet gant izili eus E.B.V. ebarzh IMBOURC'H ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. Ollivier,
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.
Priz an niverenn : 2,00 lur. Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier.
7 bd. A.-Burloud, 35000 - Roazhon.

CPPP : 50 015

D A Z O N T A R Y E Z H

Ur pennad embannet ebarzh ar gelaouenn SAV-BREIZH hevlene ha gweladenn un nebeut izili eus al "LEUR NEVEZ" e Lezvenen e devezhiou-studi S.A.E. e-pad an hañv o deus va lakaet da brederiañ adarre diwar-benn kozh kudenn an darempredoù etre an teodyezhoù brezhonek hengounel e Kornog ar vro hag ar yezh lennek a vez komzet peurvuañ e metou an Emsav.

Lavaret eo bet er pennad am eus meneget e oan-me kiriek da dezenn ar brezhoneg marv war ar maez ha na c'hello bezañ adsavet nemet er c'hêrioù ha dre ar c'hêrioù ; seurt adsavidigezh, hervez am bije diskleriet va unan, ne c'hellfe bezañ kaset da benn nemet war-bouez ul labour sturyezhañ emskiantek, a zo distaolet, war a seblant, gant aozer ar pennad, a gont dreist-holl war un "emdarzhegezh" dispac'hel bennak evit dassorc'hiñ ar yezh.

Diouzh un tu all ez eo techet izili al "Leur-Nevez" da reiñ ur pouez dreist d'an taol-mouezh ha d'ar "yezh poblek" hec'h unan ; pleustriñ a reont metou ar "vrezhonegerion a vihanik" gant ar spi da dapout un taol-mouezh reizh hag "ijin ar yezh" war un dro.

~~~~~

Meur a wech em eus meret ar c'hudennoù-mañ hag a zo anavezet mat en Emsav ; diskan ar "brezhoneg bev" keñveriet hag enebet ouzh ar "brezhoneg chimik" a oa anavezet mat etre an daou vrezel hogen, e gwirionez, an dislavar etre ar rannyezhoù pe an trefoedajoù hag ar

Yezh lennek unvan a zo ken kozh hag an Emsav e unan.  
Klask a raimp eta - ur wech ouzhpenn - dielfenniñ ar  
gudenn egiz m'emañ hiziv ha degas, maz eus tu, un tamm  
sklerijenn enni.

=====

Petra a ya d'ober ar "brezhoneg bev" ?  
Peseurt harp a c'hell reiñ d'ar re a stourm evit ar yezh ?  
Petra a dalvez politikerezh ar "mirvaoù yezh" ? D'an tri  
goulenn-mañ e klaskimp respont da gentañ.

Ober a reer eta eus ar brezhoneg bev peurvuiañ  
an teodyezhoù a vez komzet bepred gant ar gouerion e  
kornog ar vro.

N'eus mar ebet e vez klevet un tamm mat a  
vrezhoneg war ar maez e "Breizh-Izel" ha sur eo ivez e  
kejer er Skol-Veur e Roazhon pe e Brest gant un toullad  
mat a studierion eus Kornog ar vro hag a zo gouest da  
zrailhañ un tamm bennak a vrezhoneg (moarvat ned a ket  
o geriaoueg en tu-hont da vil ger bennak tra ma ouzont  
dekmiliadoù e galleg hogen barrek int da sevel frazennoù).

Gwiriañ kement-se avat ne ro ket deomp da  
c'houzout pet a dud a gomz pe a anavez c'hoazh ar yezh e  
Kornog ar vro. E deroù ar c'hantved e vrasjeded e oa ur  
milion pe ur milion daou-c'hant mil a Vrezhoned oc'h ober  
gant ar brezhoneg e "Breizh-Izel". Hiziv, peurliesañ, e  
reer anv eus 700.000 a vrezhonegerion hogen an niver-se  
n'eo adarre nemet ur brasjedadur a hañval bezañ faltaziek  
a-grenn rak n'eo diazezet war enklask na zoken sondadur  
ebet. Ret eo lavarout a-hend-all n'he deus ar Stad c'hall  
biskoazh kennebeut dalc'het kont ebet eus ar yezh en  
niveradegoù he deus graet war he ziriegezh. Al labour  
sirius nemetañ a zo bet kaset da benn e Breizh war ar  
poent-se a voe hini Gwalarn e 1929. Hogen an enklask

renet gant ar gelaouenn-mañ a oa diazezet war ar yezh arveret er c'hatekiz hag er gador-brezeg, en iliz ; ne roe titour ebet war niver hollel ar yezherion o unan.

Hiziv an deiz eta ne ouzer netra resis diwar-benn saviad ar yezh war ar maez e kornog ar vro. Soñjal a c'heller hepken ne oar ket mui ar vugale mat ar yezh pe e teskont galleg abred tre rak ne vez mui graet katekiz e brezhoneg e parrez ebet e Breizh abaoe ar brezel diwezhañ ; moarvat ez eus tu da glevout brezhoneg en iliz bep an amzer (sarmonioù ha dreist-holl kantikoù hengounel zo) hogen an oferenoù brezhoneg - nemet e-touez emsaverion - a zo dibaot tre hag a ziskouez bezañ, dre vras, un anadenn folklorik.

N'eus forzh penaos, evel ma skriven bremaik, diaes tre eo gouzout e peseurt stad emañ ar yezh war ar maez er mare-mañ. Soñj am eus bezañ graet va unan un enklask e reter Gwened war-dro ar bloavezhioù hanter-kant. Pa atersen an dud a-zivout saviad ar yezh enur c'horn-bro bennak e veze respontet din peurluviañ : amañ n'eo ket mat stad ar yezh ; it avat du-mañ pe du-se - en ur vourc'h tost alese bepred - eno emañ ar brezhoneg o vleuniañ. Ur wech erruet eno e kleven an hevelep diskan : fall eo stad ar yezh amañ hogen it amañ pe aze - er vourc'h e oan o paouez kuitaat - ha c'hwi 'welo pegen start e talc'h ar yezh eno.

Mat e vefe eta d'un aozadur bennak, da S.A.E. zoken - ha se a rofe brud dezhi - kempenn a-benn ar fin un enklask sirius a vefe memmet da dermeniñ stad an teodyezhoù komzet bepred war ar maez. Ar gwellañ evit se, d'am soñj, a vefe goulennata ar skolaerion e ser ar yezhoù a vez gouezet pe arveret gant ar vugale o tegouezhout er skol. Kement-se a rofe tu da c'houzout dres e peseurt tachenoù ez eus chañs da gavout yezherion c'hoazh a-benn ugent pe dregont

vloaz bennak. Evit bezañ efedus ha sirius avat e rankfe seurt enklask, evel ma verken, bezañ renet gant kalz a reiz d'un aozadur egiz S.A.E.

=====

Moarvat e soñjo unan e c'hellfe seurt imbours'h-adenn, siwazh marteze, digalonekaat ar stourmerion ma vefe dizoloet emañ an teodyezhoù war-nes steuziañ a-grenn a-benn ur rummad pe zaou. Hogen - estreget ne gas da neb lec'h "politikerezh ar struskañval" - gwell eo gouzout n'eus forzh penaos e peseurt stad dres emañ ar yezh. Moarvat e vo gwiriet emañ ar brezhoneg war var d'en em gavout hep dale e par an iwerzhoneg ; da lavarout eo, emañ tiriegezh ar yezh war ar maez tost da vezañ diempret ha bruzhonet etre un nebeut toleadoù chomet brezhoneger ha strewet e-kreiz rannvroadoù a-bezh gallekaet.

=====

En ur seurt saviad, ar goulenn a sav eo hini gouzout peseurt talvoudegezh a c'hell kaout an toleadoù-se evit adsavidigezh hag emled ar yezh a-c'houdevezh. Gant gerioù all, petra a ranker soñjal eus politikerezh ar "Gaeltacht" a zo bet heuliet en Iwerzhon gant ar gouarnamantoù iwerzhonat abaoe m'eo dieub ar pep brasañ eus an enezenn ? Ar politikerezh-se a gemer da bal, war a hañval, kreskiñ tamm ha tamm an toleadoù o deus miret ar yezh vroadel war ar maez betek krouiñ adarre ur "bloc'h iwerzhoneger" - pe ur "bloc'h brezhoneger" e sigur Breizh - en em astemmo penn-da-benn d'ar vro a-benn ar fin. Pe gant gerioù all c'hoazh, daoust ha talvezout a ra ar boan derc'hel an toleadoù-se evel ur mirva eus ar yezh, d'an nevez-yezherion mont di d'en em c'hourdoniñ war ar yezh vev hengounel. Sed ar politikerezh a zo renet gant ar St d iwerzhonat hag

a zo erbedet - kredapl eo - gant stourmerion vrezhon zo evel re al "Leur nevez".

=====

Notañ a rin, da gentañ, ne c'heller empennañ ur politikerezh eus ar "Gaeltacht" pe ar "brezhonegva" e Breizh nemet e degouezh ur riez vrezhon bennak mennet mui pe vui da saveteiñ ar yezh. N'eo ket gwirheñvel tamm ebet e klaskfe ur gouarnamant gall bennak sevel ijinerezhioù bihan en toleadoù o deus miret ar yezh vroadel - sed pezh a ra ar Stad iwerzhonat, da vihanañ - netra nemet evit derc'hel ar yezh vroadel bev eno.

Hogen goude lavarout kement-se e respontin-me amañ d'ar goulennoù am eus graet uheloc'h. Kavout a ra din ne c'heller ket degemer politikerezh ar "Gaeltacht" e Breizh dre ma tenn ar politikerezh-se da ober eus ar brezhonegva un doare "mirva kroc'henoù-ruz" hag eus ar vrezhonegerion ur ouennad ouezidi folklorrek gouestlet da ezhommoù al labour-douar, an touristerezh pe an istrogelled a zo troet enno deskiñ brezhoneg ; ar "ouezidi"-se a vefe neuze dispartiet diouzh ar boblañs a chomfe arallyezh hag estren outo.

Diouzh un tu all, faziet e vefe neb a gredfe e c'hell ur seurt politikerezh bezañ efedus en hon amzer-ni ma ren ur sevenadur kêrel e pep lec'h en Europa. Empennañ a c'helled er c'hantved tremenet e vevfe tud un tolead bennak serret warno o unan hep nemeur a zarempred gant an diavaez. Er marevezh-mañ avat ne c'hoarvez mui an dra-se e neb lec'h ha dre se n'eus ket da spiañ e c'hellfe ar brezhonegvaoù padout pell en ur Vreizh a chomfe a-hend-all gallekaet a-grenn.

Ne nac'homp ket moarvat e vefe talvoudus en em vataat eus ur "brezhonegva" evit deskiñ ar pouezmouezh reizh hag an troioù-lavar d'an nevez-yezherion. Hogen

arabat e vefe gortoz re diouzh hevelep pleustrerezh. Ar vrezhonegerion eus ar bobl a oar ar yezh ne ouzont ken anezhi mat, dreist-holl ar re yaouank ha moarvat e vefe talvoudusoc'h d'an deskarded war ar yezh lenn hag adlenn bepred skridoù skrivagnerion boblek an 19vet hag an 20vet kantved eget pleustriñ ur metou dizesk hanter disoñjet ar yezh gantañ.

Dre vras a-hend-all e wirier aes a-walc'h o deus an nevez vrezhonegerion desket komz ar yezh, da gantañ, e kêr, e metou an Emsav ha n'eo ket war ar maez.

Gwell eo moarvat - ha da hetiañ ez eo ivez - e rofe un nevez-vrezhoneger ul liv bennak d'e yezh o taremprediañ brezhonegerion diwar ar maez ; evidon-me, dreist-holl pa oan nevez deuet d'ar yezh, e vourren oc'h implijout gerioù ha troioù-lavar eus Gwaien, dreist-holl ebarzh kontadennoù a lec'hien e Goueled ar vro ; er vuhez pemdez e ran ivez gant un nebeut gerioù eus Kernev-Izel - evel 'chakod'e-lec'h 'godell' pe 'laez' e-lec'h 'nec'h' - hogen n'em eus roet biskoazh pouez ebet da gement-se ha dre ma tremen an amzer e teuan da soñjal ez eo gwell d'an holl arverañ ur yezh ar muiañ unvan ar gwellañ. Evel an darn-vuiañ eus an nevez-vrezhonegerion ne dremenan nemet un nebeut sizhunvezhioù e Goueled ar vro bep bloaz hag e-pad ar c'heit-se n'em bez ket tro nemeur da zaremprediañ ar vrezhonegerion a-vihanik a zeu da vezañ distankoc'h-distankañ bep bloaz e Gwaien end-eeun. A-hend-all, yezh ar gouerion pe ar vartoloded a zo, er gwellañ degouezh, - rak paour ha disneuz e chom - ur yezh vicherel (se a anzave paotred al "Leur-Nevez" e Lezneven) hag eus ar yezh-se ne c'hell ket ur c'hefredour o vevañ e kêr tennañ nemeur a ampled.

=====

Kement-se a zo bet displeget kant gwech ha soñjal a ra din ez eo koll amzer distreiñ war ar poentoù-mañ. Mallusoc'h eo, a gav deomp, klask tresañ an hent a c'hell hor c'has d'ar pal a fell deomp tizhout hag a zo adsavidigezh ur vroad vrezhon el ledenez-mañ.

An hent-se a zo bet diskouezet a bell zo : hent ar gevredigezh vrezhon an hini eo. Ar gevredigezh vrezhon-se a vo dister tre er penn-kentañ ; ne c'hoarvezo nemet **ous** un nebeut tiegezhioù hag un nebeut kelc'hiadoù en em glevo etrezo evit reiñ dezho o unan ar frammoù ez eus ezhomm anezho evit lakaat en e blomm ur gevredigezh. Kement-se eo a glask S.A.E. tizhout er mare-mañ. Moarvat n'eo ket hewel c'hoazh frouezh al labour bet kaset da benn gant an aozadur-mañ hogen ur c'hentañ amkan en deus lakaat dezhañ a zlefe bezañ diraezet didenn a-walc'h ma oar ar stourmerion urzhiañ mat o labour ; n'eus abeg ebet na vefe ket savet a-benn ur pennad amzer skolioù hollvrezhonek e pep kêr a Vreizh. Moarvat, kement-se a c'houlaka e vo bodet er memes kêr ha tost an eil d'egile tiegezhioù brezhonek stank a-walc'h evit gellout magañ skolioù brezhonek evit ar vugale. Daoust d'ar pezh a soñj lod ha d'ar pezh am eus soñjet va unan d'ur mare ez eo hgozik didalvez krouiñ tiegezhioù brezhonek ma ne c'hell ket ar re-mañ en em harpañ war ur metou hag ur framm brezhonek kreñv a-walc'h ha gouest da bourchas ur reizhiad kelenn da vugale an tiegezhioù-se. Ar pezh a vir ouzh ar vrezhonegerion diwar ar maez a legadiñ o yezh d'o bugale eo dres an diouer-se a gelc'hiadur brezhonek desket hag a framm brezhon ; ar gerent o unan zoken a oar gwelloc'h galleg eget brezhoneg. Dre se, pep striv da virout ar yezh en amlegoù-se ne c'hell bezañ nemet artifikel ha tonket dezhañ c'hwitañ. Ar skouer a zo bet meneget gant un ezel

eus al "Leur Nevez" e Lezneven e-pad devezhioù-studi S.A.E. en hañv-mañ : penaos e vije kroget kerent brezhoneger diwar ar maez da gomz brezhoneg ouzh o bugale goude bezañ kejet gant nevez-vrezhonegerion eus kêr n'he deus ket kalz a dalvoudegezh, d'hor soñj. Kredapl bras eo e tilezo ar gerent-se - ma n'eus ket anezho broadelourion c'hredus - buan a-walc'h ar froudenn-se. An emsaverion o deus savet tiegezhioù brezhonek a oar ouzh pebezh diaesterioù o deus bet da dalañ ; n'o deus gallet bezañ trec'h dezho nemet dre ma oa emsaverion anezho end-eeun ha dre ma oant gouest a-se da reiñ ur ster leun d'ar pezh a raent.

=====

Pezh a fell deomp lavarout ur wech ouzhpenn eo n'eus netra da c'hortoz diouzh an emdarzhegezh, pergen diouzh emdarzhegezh ar vrezhonegerion diwar ar maez. Souezhet bras on bet o verzout, pergen, e c'hede skriver ar pennad embannet war SAV-BREIZH adsav ar brezhoneg diouzh an Dispac'h (gant un -D- bras, na petra!). 'M eus aon ned eo an Dispac'h en degouezh-mañ nemet ur gwengel, pe, mar karit, ur moliac'h pe ur babaou. Arbennigourion hepken - hag int distank tre - a c'helle hag a c'hell kempenn ar yezh hag hec'h azasaat ouzh ezhommoù ar sevenadur arnevez ; d'ar bobl goude da zegemer pe da zisteurel ar yezh-se a vo kinniget dezhi dre hanterouriezh ur framm kelenn broadel (ha na vo ket emdarzhek, na petra!) Ha n'eus netra naturoc'h eget se : ar yezh krouet gant an Emsav ne vo lakaet e dalc'h ar bobl nemet a-drugarez d'ur reizhiad-kelenn a vezo - se a adlavar an - ar c'hontrol bev eus an emdarzhegezh rak diazezet e vo bepred war ur genurzh bennak. Faltaziañ ar c'hontrol ned eo netra nemet huñvre : egiz pa ne vije ket deuet ar galleg e Breizh pe ar

ar saozneg er broioù keltiek dre un hent all estreget hini ar framm gall pe saoz.

=====

Klozomp bremañ un tabut bet re hir, evel ma skrive ken mat Taldir e deroù ar c'hantved-mañ endev.

Kavout a ra deomp ez eo aner ar preder a laka stourmerion zo hiziv an deiz er "brezhoneg poblek". Pe e treistvevo hemañ pe ne ray ket, kement-se, d'hor soñj, n'en deus pouez ebet evit dazont ar yezh hec'h unan rak, n'eus forzh penaos, abarzh ma c'hello ur Stad vrezhon kas a-zevri war-raok ur politikerezh advrezhonekaat e vo koazhet kement niver ar re a gomzo teodyezhoù brezhonek - disheñvel bras a-wechoù an eil diouzh eben - ma n'en devo ken ar fed-se talvoudegezh stadegel ebet. Ur framm brezhon led-foran da gentañ ha foran da c'houde, degemeret gant ar boblañs hag ouzh he sterniañ a c'hello hepken advuhezekaat ar yezh. Ur c'hemm bras a-walc'h a vo marteze etre ar yezh nevez-se hag an teodyezhoù hengounel hogen ne vo ket dav en em chalañ gant an dra-se rak an dalc'h eo hepken e c'hellfe ar bobl vrezhon en em vataat eus ur yezh vroadel diseurt a vo benveg-eztaoliñ he buhez vroadel end-eeun.

Hiniennoù a hañval doujañ na ve ket kavet kement a stourmerion evit ar yezh ur wech ma vo aet an teodyezhoù hengounel da get. D'ar re a vag seurt morc'hedoù e respontin da gentañ n'hon eus ket da zibab ne vern penaos rak an Emsav n'eo kensellet tamm ebet e miridigezh pe e dilezidigezh an teodyezhoù hengounel ; er-maez eus an afer emañ rak n'en deus evit ar poent galloud foran ebet ha dre se ne c'hell herzel en nep doare ouzh an argerzh a zo o vont endro dirak hon daoulagad er mare-mañ. Respont a rin ivez e chomo hengoun ar yezh er vro-mañ keit ha ma pado an anvioù

-lec'h hag an navioù-tud en o stumm brezhonek. A-benn ar fin, piv en deus krouet hengoun ar yezh er vro-mañ nemet an Emsav e unan ? Peseurt stourmer en dije bet c'hoant da zeskiñ ar yezh ma ne vije ket bet an Emsav war an dachenn? Ma vefe graet un enklask e-touez ar re o deus boulc'het studi ar yezh a-zevri e vefe merzet ez eo deuet ar re-se eus ur metou tizhet dija gant an Emsav e unan. Eus an Emsav e teu ar stourmerion evit ar yezh ; ar re-se hepken a zesk ar yezh da vat ; ar re ha n'o deus c'hoant nemet deskiñ yezh o zataoù-kozh ne gasont ket gwall bell o studi. Ar pezh a zo da ziorren eta ez eo ur bruderezh politikel emsavel a lakay ar Vrezhoned - a chom emouez bepred ouzh o broadelezh - da gompren talvoudegezh ar yezh er stourm dieubiñ a zo renet gant an Emsav e Breizh er c'hantved-mañ.

Y.O.

+++++

GERIOU DIBAOÛ.- Teodyezh : dialecte. Emdarzhegezh : spontanéité. Gwengel : mythe. Moliac'h : merveille. Babaou : monstre. Talvoudegezh stadegel : valeur statistique.

=====

B O D A D E G - V L O A Z A R C ' H E V R E K E L T I E K

Dalc'het e voe bodadeg-vloaz ar C'hevre keltiek d'ar 26 ha d'an 27 a viz Eost e Dulenn. Ar berzhidi a oa anezho daou Skosad, pevar c'hembread, daou gerneveuriad, c'hwec'h Breizhad hag unnek iwerzhonad.

Danevelladoù eus al labour graet en anv ar C'hevre e-doug ar bloavezh tremenet a voe roet gant ar Sekretour-kreiz hag ar sekretourion-skourr. Kenderc'hel a ra ar C'hevre da seveniñ e gefridi ha niver an izili a zo uhel a-walc'h evit gallout paeañ hon embannadurioù hep sammañ dle. Gant skourr Kembre ez eas an traoù un tammig a-dreuz e dibenn ar goañv hogen lakaet e vezont en o flomm endro.

Divizet e voe embann ur gelc'hgelaouenn nevez e-lec'h al levr-bloaz hag ar c'hannadig trimiziek hon eus embannet peuz-reoliek abaoe dek vloaz. Kendalc'het e vo da reiñ keloù eus stourmoù ar broioù keltiek met pennadoù berroc'h eget ar re a veze el levr-bloaz a vo displeget enno menozioù o ren ar stourmoù-se ha kement tra a dalvoud evit kreskiñ anaoudegezh an emsaverion eus emsavioù ar broioù arall ; evel-se e vo krouet un diazez startoc'h d'ar c'henobererezh kenetrezo.

Un drederenn eus pep niverenn a vo gouestlet da bennadoù e yezhoù keltiek. Er pennadoù brezhonek, da skouer, e vo anv n'eo ket eus Breizh met eus ar broioù keltiek all : evel-se e talvezo ar gevrenn-se d'an darempredoù etrekeltiek ivez. Mat e vefe, d'am meno, displegañ e brezhoneg an darvoudoù pennañ c'hoarvezet e buhez vroadel Iwerzhon, Kembre h.a. e doare da aesaat kompren ar pennadoù saoznek o tennañ d'ar broioù-se ; mat e vefe ivez reiñ an displegadurioù-se en ur yezh eeun a-walc'h evit ma c'hellje un Iwerzhonad, ur C'hembread h.a. diwar-bouez ur geriadur diouzh ret, kompren ar pezh a vezo lavaret diwar-benn e vro-eñ.

Ar peurrest eus ar gelaouenn a vo e saozneg. Arvent a vo heñvel ouzh hini al levr-bloaz ; en deroù, da vihanañ, ne vo nemet 50 pajenn bennak e pep niverenn.

Ar c'hentañ skol-hañv etrekeltiek da vezañ bet aozet gant skourr Iwerzhon ar C'hevre he deus graet berzh-mat a-walc'h d diouzh ali ar berzhidi o unan met strivet e vo d'ober gwelloc'h er bloaz a zeu. Savet e vo ur strollad-aozañ dizale, ennañ ur c'helenner, un den da ober war-dro ar c'hendaeloù ha'r praezennoù hag unan all da ober war-dro al lojeiz hag an troiadoù. Muioc'h a amzer a vo da reiñ d'ar skol iwerzhonek. Ar mare dibabet hevlene ne oa ket mat : re a vodadoù all a oa d'ar c'houlz-se. Moarvat e terefe deroù miz Gouere ar gwellañ.

D'ar re a garfe dont e 1973, skrivañ da Caitlin Maude, 86 Br. Nortumberland, Ath Cliath 4, Iwerzhon.

War intrudu Skourr Alba e vo savet ur roll eus an aozadurioù gouestlet d'ar stourm pe d'an emsav e pep hini eus hor broioù ; evel-se e vo aesoc'h reiñ disaouzan diouzhtu d'ar re a vez o klask stlenn diganeomp. Degemeret eo bet ivez kin-nig sekretourez ar skourr-mañ e sell da aozañ ur rolleus an dud e pep bro a ve tuet da reiñ herberc'h da weladennerion eus ar broioù keltiek all, evit netra pe war zivizoù zo, - se a vefe da spisaat. Talvoudus e vefe kaout e pep kêr vras ur c'hreizenner gouest da lavarout da weladennerion diarc'hantek e pelec'h e kavfent kevanez, evit pegeit ha pe briz. D'am meno ne zlefe ar servij-se bezañ roet nemet da dud kretaet gant emsaverion anavezet mat.

Ar re a zo a-du gant ar menoz-se pe o deus gweladennoù da ginnig a zlefe skrivañ d'an Itron M. Denovan, 9 Dalgleish Rd, Dundee, Alba.

D'an 9 a viz Kerzu e vo graet ur gerzhadeg eus Buellt (stumm saoznekaet eus Builth) da Gilmeri e Reter kreiz Kembre, en e eñvor eus an tiern Llewellyn Veur, a unanas Kembre dindan e ren hag a voe lazhet diwar atiz roue Bro-Saoz e 1282. (gwelout ur pennad diwar e benn e levr-bloaz ar C'hevre : "Celtic experience : Past and present".) Fellout a ra da genturzhier Skourr Kembre, Alun ap Dafydd ober un abadenn etrekeltiek eus an degouezh-se. Sonerion ha kanerion a vo deuet mat. Evit gouzout muoc'h skrivañ da Alun : 9 Medway Rd, Casnewydd ("Newport"), Gwent, Kembre.

Hervez imbourc'hadoù nevez ez eus ouzhpenn 50% eus ar boblañs e Breizh-Veur a-du gant tennañ an arme vreizhveuriat er-maez eus c'hwec'h kontelezh Nozh-Iwerzhon. Aliañ a reer a-berzh ar C'hevre da Skosiz ha Kembreiz goulenn ma paouezor da ober unvezhioù eus o c'henvroiz evit derc'hel darn eus Iwerzhon dindan veli Vro-Saoz. War-dro 6.000 lur (da larout eo 500 Lur Saoz) a voe dastumet gant Skourr Breizh e-pad ar bloaz tremenet evit harpañ ar stourm en Iwerzhon (ar c'hwec'h kontelezh). Eus an arc'hant-se 160 Lur a zo bet kaset da NICRA ("Kevredigezh ar gwirioù Keodedel"), 80 Lur d'an "Northern Resistance Movement", 80 Lur d'ar c'hwec'h Comhaltas Tithiochta (kevredigezh evit adsevel an tiez distrujet e Béal Feirste), 40 Lur da gComhaltas Uladh evit tud kollet ganto o feadra, 25 Lur d'ur gevredigezh kenskoazell e Kontelezh Doire (ar peur-rest a chom da gas).

En em ziskleriañ a reas ar vodadeg a-du gant stourm "Cymdeithas yr iaith Gymraeg" a-enep da aloubidigezh Bro-Gembre gant diavaezidi o prenañ douar ha pennoù-tiez e-leizh ; hevelep stourm a zle bezañ renet en holl vroioù keltiek evit diwall an vint annezet gant estrenion binvidik tra ma vo skarzhet an henvroiz.

Klask a ray ar C'hevre keltiek sevel ur genreizhiad-kelaouiñ gant skriverion ha kefridiidi e pep hini eus ar c'hwec'h bro, karget da dreuzkas keleier ha d'ober kemennadennoù d'ar c'hel laouennoù. Spi hon eus e vo gallet sevel ar rouedad-se gant an aozadurioù broadel.

Levr-bloaz 1972 ar C'hevre a zo talanvet : The Celtic experience : past and present. Daou-ugent pennad a zo ennañ, pemp evit Alba, seizh evit Breizh, c'hwec'h evit Kembre, pemp evit Kerneveur, daou evit Manav, pemp evit Iwerzhon, ar peurrest o tennañ

d'an "danvez" keltiek dre vras. Ur pennad a zo e pep hini eus hor yezhoù broadel nemet e manaveg. Ul levr a 156 pajennad o koustañ ul Lur saoz (≠ 12 lur gall) Bez e c'heller e breñañ digant Jakez Derouet, 1 rue Geo-André, 44-NAONED (CCP 3 264 47 Naoned). Kaset e vo avat da izili skourr Breizh en eskemm evit o skodenn ezel.

Adanvet e voe Pdraig O Conchuir da gadoriad, Noelle Davies da deñzorier, A. Heussaff da sekretour-kreiz ar C'hevre. Frang G. Mac Thomais a vo pennskrivagner ar gelc'hgelaouenn nevez e-pad ar bloaz a zeu. Divizet e voe tremen hep prezidant ebet diwar vremañ, evit merkañ dizalc'hted ar C'hevre e-keñver nep aozadur all ha merkañ ivez ez eo ar re a labour evit ar C'hevre hag o deus an emell anezhañ. E pep skourr evelato ez eus pe e klasker sevel ur poellgor-skourr, ma c'hell daou ezel anezhañ bezañ izili anezhañ bezañ izili eus kuzul-kreiz ar C'hevre.

A.H.

=====

E deroù miz Here e vo graet prosez un nebeut stourmerion dirgel breizhat, izili eus ur rouedad led-FLB. Lavaret hon eus meur a wech pezh a soñjemp diwar-benn o obererezh ha merket war un dro e oa dlead ar vlogarourion o harpañ en enkadenn m'int gwasket enni o vezañ m'int bet memmet da stourm evit ar vro, ne vern pezh a soñjer diwar-benn koulzelezh pe zigoulzelezh o doareoù-stourm.

Hogen n'eo ket e Breizh ez eus prizonidi bolitikel da harpañ ha reiñ a reomp amañ dindan skrid ul lizher bet kaset gant sekretour-kreiz ar C'hevre keltiek evit difenn ur prizoniad kembreat barnet da 10 vloavezh galeoù ha krog d'ober dilez-boued abaoe an 23 Eost.

-----

Copy of a letter sent on behalf of the Celtic League to Prime Minister H. Heath and to home Secretary Lord Windlesham, Westminster, d'an 25-8-72

Sir,

I am writing in behalf of John Jenkins, a Welshman sentenced two years ago to 10 years imprisonment and now held in Albany prison, Isle of Wight. Until now the Celtic League refrained from expressing sympathy with the prisoner although the sentence appeared to be harsh and vindictive.

My attention has been drawn to the hunger strike which Mr. Jenkins started on August 23rd and which he was continuing at the time of my last information less than a week ago. I understand that he felt this to be necessary because of measures taken by the prison authorities which amount to a negation of his human dignity and seem designed to cause his degradation. He is refused the right to consult with the teacher of his son on matters concerning the later's education ; to get letters from anyone but close relatives ; to receive welsh language and political publications ; more recently solitary confinement and other severe restrictions were placed on him which apply only to hardened common law criminals.

I am perturbed by the fact that he is ready to endanger his life in order to secure humane treatment. To my knowledge Mr. Jenkins actions prior to arrest did not cause bodily or mental harm to anyone and his motivation was political. I fail to see why he should be so severely treated two or three years after condemnation although I am sorry to say that, along with many others in the celtic countries, I have learned to expect lack of understanding, discrimination and scant regard for our peoples' legitimate rights from the governments in London and in Paris.

Hwever, concern for this Welshman's fate impels me to ask you to interven to have him removed from the category A list of prisoners and give him the status of political prisoner or his normal prison rights so long as he is kept in jail.

A.H., Seccetary of the  
Celtic League

---

S O K I A L O U R I E Z H

H A

F R A N K I Z O U R I E Z H

Moulañ a reomp amañ da heul  
un danevell bet savet gant  
unan eus hor c'henskriverion  
diwar ur veaj graet gantañ  
e Chile e-pad miz Eost ha miz

Gwengolo diwezhañ.

Kavet hon eus deurus meurbet ar pennad-mañ dre ma laka  
war wel unan eus an diaesañ kudennoù a sav dirak ar stourmerion a  
fell dezho diazezañ ar sokialouriezh : penaos lakaat houmañ da  
glotañ gant ar frankiz ? Tamallet e vez alies "unvaenegezh" ha  
mac'homerezh ar strolladoù komunour e reter Europa, da skouer.  
Hogen daoust ha gellet o dije ar strolladoù-se, da skouer ivez,  
distrujañ ar gevalaouriezh m'o dije lezet sektennoù kleizelour  
diniver da skoilhañ o labour en ur skignañ an dizurzh ?

An dalc'h eo gouzout da besuert priz e talv ar boan  
prenañ ar sokialouriezh, ha da gentañ termeniñ amkanioù ar sok-  
ialouriezh. Ma ne servij ar sokialouriezh nemet da zistrujañ ar  
gevalaouriezh varc'hadelour evit erlec'hiañ outi ur stadelouriezh  
staavelielour e c'heller en em c'houlenn ha dav eo ober kement a  
freuz evit diazezañ ur gevredigezh nevez ha na vo ket kalz deneloc'h  
 eget an he devo bet distrujet a-gent.

Un dra a zo sur : didalvez eo klask diazezañ ar sok-  
ialouriezh dre gemm an ensavadurioù politikel hepken ; ret eo  
kemm, da gentañ, ar speredoù dre o lakaat da gompren ster ar  
gevarzhelezh. Hogen penaos ? Ma vez implijet galloud ar Stad  
evit tizhout an amkan-se - pezh a zo bet graet bepred betek hem -  
ne vo ket gounezet spered an dud evit keloù-se, - trellet ha  
touellet, ne lavaran ket, evel ma c'hoarvez bepred pa ra ar tad  
gant ar bruderezh evit lakaat he sujidi da zegemer ur politikerezh  
a zo bet divizet hep goulenn ali ar bobl rak ur bruderezh harpet  
gant ur galloud stadel ne c'hell nemet palforzhañ ar c'henskiantoù.  
Dre se e sav ar goulenn a c'houzout ha ne dremen ar wir sokialouriezh  
dre zizeriadur ar Stad, pezh a c'houlaka moarvat ivez un enkladur  
armerzhel rak war ar galloud stadel - eeun pe ameeun, e degouezh  
ar gevalaouriezh - eo bet diazezet an diorreadur armerzhel.

Setu ur sizhunvezh m'emaon e Bro Chile o tont eus Bolivia dre hent-houarn La Paz-Antofagasta. Tremen a ra an treñ dre zezerzhioù kaer-meurbet 3800 metrad a-us da rez ar mor, e-pad ouzhpenn 500 km. Diskennet on e Calama, un oaziz léc'hiet e dezerzh Atacama rak fellout a rae din mont da welout brasañ mengleuz ar bed dindan an oabl, mengleuz kouevr Chuquicamata a zo dezhi brasañ kenderc'h kouevr ar riez ha mont a ra ar c'houevr d'ober 75 % eus ezporzhiadoù Chile, da lavarout eo ez eo pinvidigezh pennañ ar vro-se. Norz ar vro zo bet kemeret diwar Bolivia gant brezel ar meurvor Habask e 1879 rak araok e oa boliviat an holl diriegezhioù-se. Ganti 200 km a ledander ha 500 km a hirder n'eo an diriegezh-se nemet un dezerzh : pe ra morse glav enni. En diriegezh-se emañ avat pennañ binvidigezh Chile : mengleuzioù houarn, hollen-moger (nitrat) ha dreist-holl kouevr...

Ne gomzin ket deoc'h eus an tu kalvezel a zo sebezus e gwirionez met fellout a rafe din kentoc'h dastum un nebeut evezhiadennoù diwarbenn an degouezh politikel.

E Kornogeuropa, ha dreist-holl e Bro-C'hall, e vez heuliet gant dudi emdroadur an traoù e Bro Chile, dreist-holl abaoe dibenn 1970 pa bakas krog er galloud e Santiago kengevredad ar strolladoù kleizat dindan renerezh Salvador Allende. Abeg pennañ an dudi-se a seblant din bezañ an degouezh<sup>e</sup> politikel gall. N'hell ket ar sokialourion c'hall goanagiñ kemer ar galloud hep ar gomunourion met spontet eo bet an darn vrasañ eus ar boblañs gant darvoudoù Tchekoslovakia e 1968 ha sellet e vez gant kalz tud ouzh ar strollad komunour evel strollad an hollveliegezh. Chile er c'hontrol a ziskouezfe dezho ez eus tu da gacout ar sokialouriezh er frankiz evel ma felle da renerion an "Nevez-Amzer Pragat" e 1967-1968. Un enepskouer eo Santiago eus pezh a voe Praka. Setu perak ez eas da skouer Mitterand, hag eñ a du abaoe pell gant an emglev gant ar gomunourion, d'ober undro e Chile un nebeut mizvezhioù zo ha da embann o tistreiñ e oa kentelius ha skouerius-tre degouzh Chile. Fellout a rafe dezhañ moarvat bezañ an "Allende gall".

Evidon-me ivez e oa degouezh Chile un dra dedennus-tre ha lenn a raen gant dudi kement keloù a zo o tont eus ar vro-se. Soñjet em boa mont da Guba e-pad un amzer rak tost tre eo da Mec'hiko met meur a levr am eus lennet er bloaz diwezhañ, en o zouez levrioù Dumont ha Karol, o deus va lakaet da gemm va mennoz.

Lenn a ris en ur gelaouenn, n'eus ket pell zo, en doa kinniget Raul Castro, breur Fidel ( ha penn gwirion ar strollad komunour kubaat) ober, dre ul lezenn, eus ar "gwariadur kelennadurezhel un torfed a-enep d'ar Stad. Tostaat a ra amzer ar spurjoù e Kuba evel da vare Stalin en Unvaniezh Soviedel... C'hoant bras oa ganin eta gwelout Chile, gwelout ur vro o tremen d'ar sokialouriezh hep feulster, hep aberzhiñ netra eus frankisioù pennañ ar geodedourion. Dudius-meurbet eo ivez gwelout war an dachenn gant peseurt kudennoù e kej ul levieriezh nevez evit kemmañ frammoù ar gevredigezh ha terriñ an ereoù sujidigezh ouzh ur riez galloudusoc'h all, ar Stadoù-Unanet evit Chile. Dudius eo rak c'hoarvezout a ray un degouezh heñvel Breizh ivez deiz-pe-zeiz. Meur a skouer all a c'hellomp kavout evel-just en istor a vremañ met dudiusoc'h eo Chile a dra sur eget Aljeria pe Viet Nam. Ur bobl europat eo ar bobl Chilat ( e straedoù Santiago emeur en Europa hep mar ebet ha gwir eo kement-se ivez war ar maez), gant un hengoun kristen kozh, gant ul live deskadurezh uhel a-walc'h ( lenn ha skrivañ a ra holl Chileiz pe dost), gant un tremenad demokratel kosoc'h eget meur a vro europat. Bihan a-walc'h eo e boblañs : en-dre da 11 milion annezad. Evel-just e c'hellfed pouezañ ivez war an diforc'hioù : un diriegezh ec'hon tre, ec'honoc'h eget Frañs, un istor a riez dieub ent politikel abaoe derou an 19vet kantved h.a.

Un den na rafe nemet tremen dre Chile a vefe souezhet a dra sur gant an niver a skritelloù hag a enskrivadurioù politikel a c'holo ar mogerioù e pep lec'h. Digredus eo e gwirionez. Ha n'eo ket enskrivadurioù lous livet buan ha dre laer diouzh an noz, tamm ebet. Er c'hontrol ez eo enskrivadurioù kempenn-tre gant lizherennoù bras, ruz, glas, du, gwer, melen, hag all... An darn vrasañ anezho zo a du gant an "Unidad Popular", kengevredad ar gouarnamant ha treset eo bet dre ar vro a bezh morzholioù ha filzier arzek meurbet. Souezhus eo ivez merzout n'eus ket a enskrivadurioù o saotrañ hag o c'holeiñ enskrivadurioù kosoc'h, doujet e vez enskrivadur an amezeg. E Bro Chile n'eus moarvat morse a emgannoù etre pegerion-skritelloù evel ma c'hoarvez aliès er broioù latinat arak an dilennadegoù. Eus an holl enbroerion a yeas da Chile abaoe ur c'hantved e teue ur bern eus Kornog ha Norzeuropa, en o zouez un toullad mat a Vrezhoned. Setu marteze perak n'eo ket heñvel gizioù politikel Chile ouzh re ar riezoù suamerikat all.

Pa stager da gejañ ha da gomz gant an dud e tizoloer n'eo ket ar fonnusted-se a skritelloù hag a enskrivadurioù un darvoudenn diwar c'horre hepken. Prest eo an holl pe dost da gomz diwar-benn ar c'hudennoù politikel. Abaoe eizh devezh em eus bet tu da gomz gant tud a bep seurt : kouerion, implijidi, ijinerion, studierion, micherourion, hag all... ha gant an holl ez eus bet tu da gomz diwar-benn politikerezh o bro. Klevet emeus e oa ar bobl Chilat ar bobl bolitikelaetañ er bed a-vremañ ha gwir e seblant din bezañ. E-keñver Chiliz n'eo ar C'hallaoued nemet bugale, hag int koulskoude o komz bepred eus ar boued hag eus ar politikerezh... Siriusoc'h eo ar Chiliz. Lenn a reont kalz, studiañ ar c'helennadurezhioù politikel hag armerzhel, eus ar faskouriezh d'ar varksouriezh. Komz a ra peurliesañ an dud, ha dreist-holl ar re yaouank, diwar-benn traoù a anavezont diwar bezañ prederiet mat warno.

An darn vuiañ eus an dud am eus gwelet betekhenn ( ha kement-se a zle bezañ anavezet gant an holl rak kaeroc'h e weler alies an traoù eget n'int e gwirionez), ar pep brasañ eus an dud, emezon, a sav a-enep d'ar gouarnamant en un doare taer ha flemmus peurliesañ. Bewech ma kejer gant kudennoù e klever ar ribourtadenn " Petra fell deoc'h, ni 'zo ur vro sokialour ! Setu da belec'h e kas ar gomunouriezh !" ha kement-se gant c'hwervoni ha dismegañs.

Evit gwir n'eus nemet ur sizhunvezh m'emaon er vro ha gortoz a ran c'hoazh evit diazezañ gwelloc'h va mennoz, met sebezus eo memestra rak kejet em eus dija gant ur bern tud, paotred ha merc'hed, kozh pe yaouank, dezho micherioù dishéñvel-tre... Dilennadegoù a vo e miz meurzh 1973 evit neveziñ ar parlamant ha gwelet e vo an disoc'hoù neuze met ma vijent hiziv ez afe moarvat an holl vouezhioù pe dost gant strolladoù an eneberezh, ar strollad demokratel-kristen (kreiz) hag ar strollad broadel (tu dehou). Un nebeut mizvezhioù zo, e mezheven 72, ez eus bet dilennadegoù e-touez ar vicherourion hag int "sichenn" ar gouarnamant sokialour, evit dilenn strollad-ren ar C.U.T. (Central Unica de Trabajadores) ur benvegad a gomz en anv ar vicherourion gant ar gouarnamant hag ar vistri evel an Trade Union Congress e Breizh-Veur : dastum a reas an demokrated-kristenion, ha n'o doa pouez ebet arack er C.U.T., un drederenn eus ar mouezhioù, o kemer zoken ar brasañ niver e kreñvlec'hioù an tu kleiz evel mengleuzioù kouevr an norz !

Evel-just ne gemmfe ket kalz tra un trec'h eus an tu dehou e dilennadegoù 1973 rak dilennet eo bet al leviour Salvador Allende evit 6 bloaz , da lavarout eo, betek 1976, ha leviañ a c'hell daoust d'ar parlamant evel ma ra dija abaoe 21 miz. Diskouez a rafe memestra seurt disoc'hoù n'eo ket al lod brasañ eus ar bobl adu gant e bolitikerezh, tamm ebet.

Disheñvel eo eta degouezh Chile eus pezh edon o c'hortoz hag eus pezh a greder moarvat e Breizh hag e broioù all. Empennañ a raen, diwar lenn ar c'helaouennoù, ur bobl vihan ha kalonek, gourdrouzet gant kevredadoù bras ar Stadoù-Unanet evel an I.T.T., an Anaconda Company, h.a..., o stourm unvanet gant e rener Salvador Allende evit mont d'ar sokialouriezh ha tec'hout evit mat diouzh an isdiorreadur. Ur fazi a raen o faltaziañ an traoù gant kement a eeunded : kalz kemplesoc'h int e gwirionez. Dipitus ha trist eo met ar wirionez eo am eus kejet ganti o tegouezhout e Bro-Chile : an darn vrasañ eus Chiliz a gavfe gwelloc'h ur gouarnamant all. Perak ?

N'eo ket diaes kavout ar respont hag ur gentel dalvoudus eo evidomp-ni : abaoe un nebeut mizvezhioù ez a war fallaat buan-tre stad an armerzh chilat evel m'en diskouezin un tammig pelloc'h, hag e seurt degouezh n'eo ket ar re binvidik a c'houzañv ar muiañ, ar re baourañ ne lavaran ket. Re aes eo evit ar bolitikourion sellout gant dismegañs ouzh ar c'hudennoù armerzhel ha lakaat ar mennozioù kaer a-us da bep tra ; an tech-se a gaver e strolladoù an tu kleiz e Bro-Chile hag alies ivez e touez kefredourion hon Emsav. Ret eo gouzout avat ne dalv netra ar mennozioù politikel kaerañ evit ar pep muiañ eus an dud, hag int Breizhiz pe Chiliz, ma welont o barr-bevañ o koazhañ gant al levieresh nevez. Ne lavarin ket emañ ar Chiliz o vervel gant an naon, ne vefe ket gwir, met abaoe 21 miz a c'houarnamant sokialour o deus gwelet o barr-prenañ o vont war strishaat, o deus gwelet meur a vad eus ar vuhez pem-deziek o vont war rouesaat, o deus gwelet ar prizioù o sevel prim ha prim.

Devoudoù resis a fell din degas amañ : setu pezh am eus lennet war ar c'helaouennoù abaoe ur sizhunvezh :

- kresket eo bet eus 60 % ent keitat priz an tankirri pevar deiz zo : un daou-varc'h Citroën (kenderc'het a vil vern amañ abaoe bloavezhioù dre ma z'eo marc'had-mat da brenañ ha da implijout) a dalv bremañ 150 000 escudos e lec'h 90 000 un nebeut devezhioù arak.

- kresket eo bet eus 100 % priz ar skinwelerezed
- Kresket eo bet eus 85 % priz eus kenderc'hadoù ken pouezus evit ar tiegezhioù ha kafe, sukr, te, bleud, amanenn ha margarin.
- Kresket eo bet eus 60 % priz an dilhadoù
- daougementet eo bet priz al legumajoù pennañ evel an avaloù-douar, ar c'harotez hag an ognon.
- kresket eo bet eus 200 % priz ar c'hig-buoc'h.

Meur a skouer all a vefe tu da reiñ c'hoazh met spontus a-walc'h eo ar skouerioù-se. Va unan, er boued-tiez, am eus ranket paeañ alies 50% muioc'h eget ar priz merket ouzh ar voger evit urc'hafe, un evaj, pe ur pred rak n'o doa ket bet amzer tud an ti da reizhañ ar priz kozh c'hoazh.

Lavarout a ra ar gouarnamant e vo kresket ar goproù hag ar c'horvoderioù all dizale met evit ar mare en em gav paouroc'h ar Chiliz eget arak. Gant o labour e c'hellont prenañ nebeutoc'h a vadoù eget na c'hallent un nebeut mizhvezioù abretoc'h. An holl dud o doa dastumet arboelladoù e sell da brenañ un tankarr da skouer, o deus ranket dilezel an huñvre kaer-se. Kalz mammoù a ranko reiñ nebeutoc'h a gig hag a laezh d'o bugale, hag all...

( An holl greskoù-se embannet en Diario Official zo bet divizet gant ar gouarnamant ! )

Ur c'helenner gall yaouank en Antofagasta a lavare din e kolle meur a eurvezh bemdeiz oc'h ober ar marc'had evit e diegezh. Dirak meur a stal-genwerzh, da skouer tiez ar varaerion, e weler steuda- doù tud o c'hortoz. Abaoe ur mizvezh ne vez ket gwerzhet ken kig buoc'h e Chile rak diouer a ra er vro. Daoust da Chile bezañ ur vro c'houne- zel gant barregezhioù bras, e tle enporzhiañ hiziv laezh, bleud ha ma- doù all... Dec'h e voe arsailhet ur c'higer-ti e Magllanes, e su pellañ Chile, gant kantadoù a vaouezed kounnaret. E pep lec'h emañ an dud o vallozhiñ ar gouarnamant en abeg d'an diaesterioù armerzhel-se.

Gouzañvus eo ar seurt strizhderioù e-pad ur brezel evel e Breizh tregont vloaz zo pe c'hoazh en un degouezh a ziforc'h evel hini Kuba da vare ar c'haeadur gant ar Stadoù-Unanet met digomprenus a grenn eo en ur vro evel Chile, a c'hell kenwerzhañ gant holl vroioù ar bed, e amezion, Japon, Kornogeuropa, broioù sokialour, h.a... ur vro na a- navez na brezel-diabarzh, na brezel etrevroadel. Ouzhpenn-se en deus

kavet Salvador Allende o tegouezhout d'ar galloud ar 4 a viz du 1970, un armerzh yac'h goude 6 vloavezh a levierzh kristen-demokratel. Leun e oa kefioù ar Stad, araokadennoù bras en doa sevenet ar greanterezh, kroget mat e oa bet adaoz ar gladoù, perc'hennet e oa bremañ gant ar Stad Chilat ouzhpenn 50 % eus kevala an holl vengleuzioù, hag all... Evel-just e oa kreñv a-walc'h ar monc'hwezh (+ 29,3 % e 1969) ha sammet e oa ar vro gant dleadoù gwall bonner e-keñver ar riezoù all, dreist-holl ar Stadoù-Unanet, goude bezañ adprenet brasañ niver al lodennoù e kevredadoù ar c'houevr.

Skoet en doa Chile war du an araokaat armerzhel ha kevredigezhel e 1964 gant trec'h ar strollad demokratel kristen renet gant Eduardo Frei. Dont a rae goude meur a vloavezh gant gouarnamantoù eus an tu dehou (nemet ur gouarnamant eus "frente popular" etre 1938 ha 1941) hag ar wech kentañ e oa evit ur strollad demokratel-kristen dont d'ar galloud e Latinamerika. Gant e roll-labour a ginnige kempennoù-bras e seblante un taol-arnod pouezus-tre evit ar c'hevandir a-bezh, dreist-holl d'ur mare m'edo o tiwanañ oaledoù guerilla e meur a vro, gant skoazell Kuba. En abeg da se ivez e oa sellet outañ gant dudi ar Stadoù-Unanet lec'h ma klaske al levierzh Kennedy termeniñ ur politikerezh nevez e-keñver Latinamerika. E Bro-Chile hec'h-unan e voe stourmet gant kounnar ouzh holl gempennoù ar gouarnamant Frei gant an tu dehou na vane ket dilezel e zrestgwirioù. E-pad al levierzh demokratel-kristen ivez e tiwanas er werin chilat ar skiant eus he nerzh hag eus he gwirioù.

Klask a reas ar gouarnamant Frei bihanaat an dizingalderioù bras a gaved er gevredigezh chilat dre ur politikerezh evit addasparzhañ ar c'horvoderioù. Kempennet e voe reizhiad an tailhoù ha dreist-holl e stagas ar gouarnamant gant adaoz ar gladoù o tiberc'hennañ al latinfundios, a yae d'ober ar pep muiañ eus ar gorread gounezel. Mont a reas goustadik ha gant evezh bras en ur gas da benn ar c'hempennoù-se. Gant kement a evezh e stagas da "chilekaat" an ijinerezhioù greantel, ha da gentañ penn ar mengleuzioù, dre adprenañ an niver brasañ eus kevrennoù ar c'hevredigezhioù estren diazezet e Chile. Rebechet e voe outañ gant an tu kleiz bezañ kinniget digolloù kalz re vras d'ar c'hevredadoù norzamerikat hep kemer e kont an holl vuzadoù o doa graet er bloavezhioù kent.

Ur c'hevaled fiziañs digredus a gavas Eduardo Frei er bobl chilat er bloavezhioù kentañ, nemet e-touez ar vourc'hiziezh uhel a glaskas moc'hañ e gempennoù. Hervez an holl en dije gellet mont kalz pelloc'h eget na reas war dachenn ar c'hempennoù. Rebechet e voe outañ er c'hontroll adalek 1968 mont re c'houstadik : stourmerion eus ar strollad demokratel-kristen a yeas kuit evit krouiñ ar MAPU (Movimiento de Acción Popular Unitaria) a gemer perzh hiziv er gouarnamant sokialour. Anat e oa e 1970 e oa ret mont kalz pelloc'h war hent an treuzfurmadurioù. Hervez ar vonreizh chilat, ne c'hell ket ar prezidant en em ginnig evit ar c'hwec'h bloaz a heul ha dibabet e voe evel danvez-prezidant an demokrated-kristenion, Clodomiro Tomic, dezhañ mennozhioù radikaloc'h. Strolladoù kozh an tu dehou, ar strollad frankizour hag ar strollad mirour a unanas o nerzhioù evit krouiñ ar Strollad Broadel hag a ginnigas Jorge Alessandri, bet leviour eus 1958 da 1964. Salvador Allende a voe danvez-leviour ur c'hengevredad a strolladoù eus an tu kleiz, an "Unidad Popular", an daou strollad pouezusañ ennañ o vezañ ar strollad komunour hag ar strollad sokialour. Danvez-prezidant e oa bet dija Allende e 1958 evit ur seurt kengevredad eus an tu kleiz, ar "Frente de Acción Popular" ha trec'het e oa bet gant Alessandri, e-trezo hepken 30 000 mouezh a ziforc'h.

Ar wech-mañ avat e tastumas an Unidad Popular an niver brasañ a vouezhioù er vro : 1 075 000 da lavarout eo 36,3 %. Ne oa ket un trec'h bras ha splann ha ret e oa d'ar parlamant mouezhiañ evit dibab da vat ar prezidant da zont. Adalek ar 4 a viz gwengolo 1970, kerkent ha ma voe anavezet trec'h kenveriek Allende e c'hwezhas un avel spont war ar vro: N'an doa ket kuzhet Allende arack an dilennadegoù e felle dezhañ ha d' e zalc'hidi blenian Chile war hent ar sokialouriezh ha neuze ar renkad bourc'hizel a stagas da dennañ e fiziadoù diouzh ar bankoù, da gas kement arc'hant ha ma c'helle d'ar broioù estren, ehanet e voe ur bern chanterioù, gorrekaet an obererezh greantel ha war zigreskiñ ez eas ar c'henderc'h (sevel a reas ar feurdilabour e Santiago da 12 % eus ar boblañs-labour), digreskiñ a reas kalz gwerzh an talvoudennoù en eskemmi Santiago, gwerzhet e veze tiez, kirri, arrebeuri a vil vern hag evit prizioù dister gant tud o tec'hout ha leun e oa an holl nijerezhioù o vont d'an estrenvro. Anvet eo bet an eizh sizhunvezh-se, gant ar gouarnamant sokialour, an "ergerzhadeg a sponterezh armerzhel"(Campaña del Terror Economico) met emdarzhnek e voe dreist-holl.

Daou vizvezh goude an dilennadeg ha goude meur a vreuradenn er parlamant e voe anvet Salvador Allende prezidant hag ez antreas e Palacio de la Moneda, palaz ar prezidant, d'ar c'hentañ a viz du evit derc'hel kentañ kuzul e vaodierned. Daou zevezh war lerc'h e oa adskoulmet an darempredoù diplomatel gant Kuba ha tri devezh war lerc'h e stagas an Araukaniz (anvez ivez Mapouchiz) da alcubiñ atantoù e su Chile, o lakaat ar gouarnamant en un degouezh diaes.

A orin europat eo an darn vrasañ eus Chiliz, nemet en norz lec'h ma kaver Indianed hag hironed kar da re Berou ha Bolivia, hag er su lec'h ma kaver an Araukaniz. Souezhus eo istor ar bobl indian-se ha ne voe morse sujet gant ar Spagnoled daoust da veur a vrezel kriz. Da get ez eas impalaerezhioù ec'hon meurbet evel an impalaerezh inka pe an impalaerezh aztekat dindan un nebeut mizvezhioù met morse ne zeuas a-benn ar Spagnoled da sujañ ar bobl gen -se strewet e koadeier ar su daoust da dri c'hantved a stourmoù kriz. Morse ne zeujont a-benn da ziazezañ trevadennoù padus e su ar rio Bio-Bio, harzoù naturel ar vro araukan. En aner e klaskas henn ober ivez ar republik chilat yaouank e deroù an 19vet kantved. N'eo nemet gant an enbroerezh europat yoc'hel eus kreiz an 19vet kantved betek ar c'hentañ brezel bed e voe digoret an tiriegezhioù-se d'ar sevenadur", da lavarout eo e roas gouarnamant Santiago perc'hentiezh an tiriou-hont d'an difraosterion a zeue d'o zrevekaat, en o zouez kalz Alemaned ha tud al Lec'h-lann. Mont a reas an Araukaniz, kollet ganto o ziriegezhioù chaserezh, d'ober ur werin reuzeudik o krakvevañ dirak atantoù bras a oa tiriou o hendadoù. N'eus nemet 300 000 anezho (war ur boblañs chilet hollet eus 11 milion annezad), 50 000 a wad indian glan, met prometet en doa an Unidad Popular plediñ gant o c'hudenn, arack an dilennadegoù. Ne fellas ket d'an Indianed gortoz muioc'h ha kerkent ha ma voe diazezet ar gouarnamant er galloud e voe rediet da bleidiñ ganto. N'eo ket diskoulmet da vat ar gudenn-se met kalz tiriou o deus adkavet dija.

Gant kudenn an Araukaniz eta e krogas buan adaoz ar glad dindan al levierezh nevez. Dindan 10 mizvezh e voe diberc'hennet 1 200 000 hektar ha goude 18 mizvezh a levierezh sokialour e save da 3 374 niver ar gourferc'hentiezhoù a oa bet diberc'hennet (evit keñveriañ, o doa diberc'hennet an demokrated-kristenion e-kerz 6 vloaz 1408 gourferc'hentiezh a dra sur ar re vrasañ)...Ken buan ez eas ar gouarnamant sokialour er gennadoù all : stadelaet e voe ar mengleuzioù glaou, houarn, holen-voger, h.a. Stadelaet e voe kalz embregerezhioù bras, gwiaderezhioù, an holl van-

koù dindan un nebeut mizhvezhioù. Adalek miz kerzu 1970 e stagas ar gouarnamant da blediñ gant kudenn ar c'houe: vr. Kavout a rae dezhañ (gant gwir abeg, a gav din) e oa bet kalz re vrokus ar gouarnamant kent evit digoll an daou gevredad bras a gorvoe ar c'houevr chilat abaoe hanter kant vloaz, an Anaconda Copper Company ha Kennecott Copper Company, met n'helle ket e-unan terriñ an emglev a oa bet graet nebeut amzer araok ganto hag ar gouarnamant kent. Ret e oa kemm arroudennoù eus ar vonreizh. Setu perak e voe breutadennoù er parlamant e-pad meur a viz-vezh war an danvez-lezenn vonreizhel ha mouezhiet e voe erfin a-unvouezh gant an holl gannaded. D'an 11 a viz gouere 1971, "devezh an dellid vroadel" (Día de la dignidad nacional) e tisklerias Salvador Allende d'ar bobl chilat e touez lidoù bras, e oa bet stadelaet evit mat ijinerezh ar c'houevr.

Uhel-tre e oa neuze brud ar gouarnamant er vro, nemet evel-just e-touez tud an tu dehou a oa gwelloc'h ganto tevel er mare-se. Kresket kalz e oa bet an holl gorfoderioù izel (liesaet dre zaou pe dri ar goprou izelañ!!) adalek deizioù kentañ ar gouarnamant sokialour hag un taol lañs nevez a oa bet roet d'an armerzh, war lerc'h an daou vizvezh a strafuilh o doa heuliet an dilennadegoù. D'ar 5 a viz ebrel 1971, e voe dalc'het dilennadegoù evit neveziñ ar c'huzulioù-kêr ha 50,86 % eus ar mouezhioù a yeas da Strolladoù an Unidad Popular. N'o deus ket seurt dilennadegoù an hevelep pouez ha dilennadegoù alleviourpe ar gannaded; diskouez a raent mat memestra edo an darn vrasañ a-du gant politikerezh ar gouarnamant. Seizh kannad eus ar Strollad demokratel-kristen a guitaas o strollad evit mont da grouiñ ur strollad nevez a-du gant an Unidad Popular : Izquierda Cristiana (Kleiz kristen), a chomas distag diouzh ar MAPU daoust d'o orin heñvel. D'ar 4 a viz du 1971, evit deiz-ha-bloaz kentañ ar gouarnamant sokialour ez embannas Allende e teufe Fidel Castro da weladenniñ Chile, un nebeut devezhioù war-lerc'h. Pa zeuas e voe graet dezhañ un degemer boemus e pep lec'h. Ar barr uhelañ eus asant ar bobl chilat d'ar politikerezh sokialour e voe moarvat.

Edo an diaesterioù o tont dija. E brasañ mengleuz ar vro e kavas Fidel Castro ar vengleuzierion en ec'hwel ha klask a reas displegañ dezho e oa ret adkregiñ gant o labour evit sevel ar gevredigezh sokialour nevez. (Paet gwelloc'h eget al labourerion chilat all e oa mengleuzerion ar c'houevr da vare ar c'hevredadoù morzamerikat ha mont

a raënt d'ober un doare brientiniezh e renkad ar vicherourion. E dibenn 1970, pa voe kresket kement ar c'horvoderioù izelañ e voe dister kresk goprou ar vengleuzerion, pezh n'int ket evit degemer, o tiskouez o diouer a emskiant-renkad).

War washaat ez eas an traoù e dibenn 1971. Araok an dilennadegoù o doa rebechet strolladoù en tu kleiz ouzh ar gouarnamant Frei, e touez traoù all, ar monc'hwezh a strishae bepred barr-prenañ al labourerion. E-pad ar bloavezh kentañ e klaskjont revañ ar prizioù ha gorrek e voe o c'hresk e 1971 met sevel a rejont eus +33 % e-pad 6 miz kentañ 1972 ha gant kreskoù an deizioù diwezhañ o vont eus +60 % da 200 % ez eo deuet ar monc'hwezh da vezañ ur gwir euzhvil evit an holl. N'eo ket c'hoazh par da vonc'hwezh Alamagn e 1921 ha 1922 pa greske bemdeiz pris an tamm bara ha pa oa ret paeañ milionoù mark evitañ, met ne vo ket kavet un armerzhour dre ar bed (nemet e ti ar re sot) evit lavarout ez eo yac'h stad an armerzh chilat. Anat eo n'eo ket mestr ken ar gouarnamant eus an sa rad armerzhel.

Gant ar monc'hwezh ivez emañ o koazhañ talvoudegezh an Escudo, moneiz ar vro. Diwerzhekaet eo bet dija meur a wech er bloavezhioù diwezhañ. Hiziv e vez gwerzhet 46 escudo evit un dolar er bankoù (d'an douristed) met kinniget e vez evit un dolar er marc'had-du 200,250 ha betek 350 escudo ! Ne vez ket gwelet koulz lavaret moneiz-metal met bez ez eus bilhedoù un escudo, un hanter-escudo ha zoken dek santim a escudo ( pezh a dalv 0,01 FF er feur-eskemm kefridiel ha seizh gwech nebeutoc'h er marc'had-du). Ma vije roet ur seurt bilhed d'ur c'hlaskerbara, me 'gred, en distalfe raktal gant dispriz rak ne c'hellfe prenañ netra gantañ. Tu a vefe da baperañ mogerioù ur sal evit ur priz izeloc'h eget gant paper arbennik...

Emañ an tu dehou, hag eñ ken sioul e-pad ar bloavezh kentañ, oc'h adsevel ar penn gant ma wel ginadur ar boblañs. Kalz trouz a ra abaoe un nebeut mizioù ul luskadig damfaskour, Patria y Libertad, (Broad ha Frankiz). Aozet eo bet gant ar strollad broadel hag ar strollad demokratel-kristen dibunadegoù bras a-enep da bolitikerezh ar gouarnamant. Ar pep fentusañ a zo bet "dibunadegoù ar c'hastelodennoù", enno miliadoù a verc'hed, merc'hed pinvidik eus ar vourc'hiziezh peurlieusañ, o tibunañ dre straedoù ar c'hêrioù bras gant kastelodennoù goullou evit klemm ouzh ar verrentezh hag ouzh ar strizhadurioù. Dilennadegoù

a vo e miz meurzh 1973 evit ar parlamant ha leun a fiziañs eo an enebadur.

Klask a rin displegañ en un nebeut linennoù abegoù an enkadenn armerzhel-se. Daoust da strivoù levrierezh Frei ha daoust d'e youl-vat e chome dizingalderioù bras-kenañ er gevredigezh chilat : war-dro 20 % eus ar boblañs ne gemere ket perzh en armerzh ar riez ha d'an hevelep koulz ez ae gant 13 % eus ar boblañs 50 % eus ar bevezerezh broadel. Ouzhpenn-se e kaved e Chile (evel en holl vroioù isdiorreet) barregezhioù-kenderc'hañ isimplijet : da skouer, un embregerezh, dezhañ ijinennoù evit kenderc'hañ 20 000 biñs bemdeiz, ne genderc'he nemet 12 000 biñs dre ma ne c'helle ket gwerzhañ muioc'h war ar marc'had broadel. Liammet e oa an daou dra : gwan e oa an ijinerezhioù greantel hag an obererezhioù armerzhel all dre ma chome re izel barr-prenañ ar vevezerion evit mont d'ober ur marc'had ledan a-walc'h.

Setu perak e tivizas renerion nevez ar vro ken-ha-ken kreskiñ ar c'horvoderioù izelañ ha rediañ an embregerion da genderc'hañ ar muiañ ma c'hellent, (ma ne felle ket dezho bezañ diberc'hennet). Ar gundenn eo e voe kresket ar c'horvoderioù kalz re ha kalz re vuan hep ma kreskfe ivez ar genderc'husted pe al labour, hag e voe monet kalz re a vonreiz nevez eget ma c'helle lonkañ an armerzh chilat. Reolennoù zo en armerzhouriezh, a dalv en ur reizhiad kevalaour evel en ur reizhiad sokialour ha ne vo morse renet ur politikerezh armerzhel yac'h gat gerstur ar c'horonal Hugo Banzer (rener faskour Bolivia abaoe miz eost 1971) : "dar a los que necesitan, sin quitar a los que tienen". (Reñ d'ar re o deus ezhomm hep lemel digant ar re o deus). (!) Ne oa ket spletus kennebeut evit an embregerezhioù kenderc'hañ d'al live uc'hek rak dont a ra ur poent ma kresk buan an holl goustoù : da skouer e ranker paeañ gwelloc'h an eurvezhioù ouzhpenn. Evit stourm ouzh ar monc'hwezh e reolas ivez ar gouarnamant nevez an holl brizioù ; war vihanaat ez eas neuze buzadoù an embregerezhioù ha dic'hallus e teuas kas da benn postadurioù nevez.

Ne voe ket meizet arvaroù ar politikerezh-se e-pad ar miz-vezhioù kentañ. Er c'hontrol e rene ar gwelwelerezh e pep lec'h. Ur bern tud, kresket o barr-bevañ (daou pe d'ic'hementet a-wechoù) a stagas da veveziñ evel n'o doa graet morse arak. War vuanaat ez eas red ar madoù ha red ar moneiz. C'hwezhañ a reas kengreadoù ar genwerzhourion.

Pa ne oa ket ar c'henderc'h chilat evit bastañ d'ar goulenn, ez enporhied madoù beveziñ eus an diavaez. Kalz tud a stagas da zebriñ kig, kalz tud a stagas da veajiñ dre Chile (marc'had-mat-tre e oa ar beajoù :war-dro 18 F dre garr boutin ha 60 F dre garr-nij eus Antofagasta da Santiago, 1300 kilometrad), h.a... Mat-tre e oa evel-just kement-se diouzh ar savboent kevredigezhel met lakaat a rae en arvar an dazont armerzhel. N'heller ket eostiñ ma n'eo ket bet hadet ar parkeier...

Poanius eo hiziv an dihun evit an holl. Diviet eo bet dindan ur bloaz an holl gementadoù a vonezioù estren a oa e kofioù ar Stad ha dic'hallus eo deuet da vezañ enporzhañ an darn vrasañ an danveziù bremañ (dreist-holl gant ma tigreske ar c'henderc'h kouevr, esporzhiadur bras Chile). Diviet eo bet ivez staliadoù 'zo er c'henwerzh ha ne vez kavet an traoù-se nemet er marc'had-du ha da brizioù uheltre. E dalc'h an enporzhiadoù eo ur vro c'hounezel ha nebeut diorreet evel Chile ha ma vezont harzet, e vez santet buan diouer ur bern madoù : louzeier en apotikerezhioù, pezhioù-eillec'hiañ er c'harrdioù, levrioù el levrديوù, h.a... Gwasoc'h eo bremañ eget kent isimplij ar barregezhioù kenderc'hañ : a-sav e chom kalz ijinenoù dre ziouer a bezhioù, a-sav ivez kalz tankirri ha kalz kirri-boutin. Grevus-tre eo pa weler da skouer e kêr Antofagasta (brasoc'h eget Brest), n'ho deus an embregerezh stadal Empresa de Transportes del Estado nemet 18 karr-boutin o vont en dro war 50. A sav eo chomet hiziv an 32 karr all ha leunchouk eo eta ar c'hirri-boutin a gerzh c'hoazh.

Evel-just en deus bet ar gouarnamant traoù all d'ober eget krouiñ embregerezhioù nevez e-pad e 20 mizvezh kentañ ha diouzh o zu n'o deus ket an embregerion brevez, ha n'int ket bet diberc'hennet, sevenet postadurioù nevez pe glasket nevesaat o faramantadur hag o zeurkadur gant aon rak koll pep tra dizale. En embregerezhioù niverus a zo bet stadelaet ez eus bet peurliesañ dizurzhioù bras er c'henderc'h gant disperti ar sternioù kent, dreist-holl er c'hevredadoù estren rak ne voe ket a dud stummet e-touez ar Chiliz evit kemer o lec'h. Daoust da c'herioù-stur ar gouarnamant evit "gounit emgann ar c'henderc'h" e seblant aet war zigreskiñ ar c'henderc'h greantel ha gounczel er mizioù diwezhañ. Gant kalz evezh e tleer komz eus kement-se rak n'eus ket tu da gaout stadegoù ergorel hiziv er Chile : strolladoù an tu kleiz a zisklerie nebeut amzer zo e oa bet ur c'hresk eus 12 %

er greanterezh e c'hwec'h miz kentañ 1972 ; hervez an eneberien ez eus er c'hontrol un digresk spontus.

Pezh a zo sur eo krizder an enkadenn a-vremañ. Klask a ra ar gouarnamant lakaat ar giriegezh anezhi war an drafikerion a vefe o taspugn madoù evit gounit arc'hant diwar goust ar werin. N'eo ket gwall sirius evit displegañ un enkadenn ken grevus ha ne c'hell ar marc'had du nemet bezañ un heuliadenn eus an enkadenn. Div wech am eus bet tu da wiriañ falsentezh an tagadennoù renet gant kelaouennoù an tu kleiz ( ha na vezont lennet nemet gant nebeut a dud). Flatret e voe da skouer un deiz e lizherennoù bras war ar bajenn gentañ, ar gevalouri UNICOOP evit bezañ daspugnet en he stalioù sac'hadoù bleud, riz ha sukr ha boestou-mir, ha roet e oa sifroù er pennad. Souezhus e oa memestra a-berzh ur gevalouri-vezevañ hag a glask er c'hontrol gwerzhañ marc'had-mat d'hech izili hep ober buzadoù. Ne voe ket diaes d'ar gevalouri UNICOOP dislavarout an deiz war-lerc'h flatredannoù ken faltazius ha diskouez gant meur a sifr he doa ezhomm eus ar staliedoù-se evit bastañ da c'houlenn ar sizhun. Anat e oa er c'hontrol e oa izeloc'h live ar staliedoù eget boaz en abeg d'ar verrentez... Daou zevezh war lerc'h e oa un titl bras war bajenn gentañ ar c'helaouennoù sokialour "RAZHED AR MERCURIO A VROUD AR MARC'HAD DU"! (El Mercurio zo brasañ kelaouenn Chile, o tennañ a-wechoù da ouzhpenn 250 000 skouerenn, tost e seblant din bezañ eus ar strollad demokratel-kristen ha strizh eo alies evit politikerezh ar gouarnamant). Rebechet e veze ouzh El Mercurio ar c'hemennadurioù bihan a gaver ennañ war seizh pajenn, tud a glask prenañ pe werzhañ liñseloù kozh, arrebeuri uzet, hag all... Ne voe ket diaes evit al Mercurio respont ouzh an dagadenn gunujennus-se an deiz war-lerc'h o tiskouez ne vefe ket ret d'andud embann seurt kemennadurioù ma vefe tu da brenañ liñseloù ha seurt madoù ecun er c'henwerzh. Ouzhpenn-se en deus displeget e oa ar bruderozh hag ar c'hemennadurioù bihan pennañ doare da gellidañ ar c'helaouennoù dieub. Ma klaskfe ar gouarnamant berzañ ar c'hemennadurioù-se, e vefe kement ha mougañ frankiz ar c'helaouiñ. Un nebeut devezhioù zo e oa tu da lenn ivez war ar c'helaouennoù sokialour ha komunour un titl enkrezus, ur frazenn eus al leviour Allende " Lakaet e vez en arvar frankiz ar c'helaouiñ gant

an droukimplij anezhi", pezh a dalveze kement ha "ma kendalc'h kelaouennoù zo da bismigañ politikerezh ar gouarnamant, vint lakaet da de-vel evit mat"...

Fazioù en deus graet ar gouarnamant war dachonñ amarmorzh evel m'hon eus gwelet, met gwasoc'h eo bet c'hoazh e fazioù war dachennoù all. N'heller ket rebech kement-se ouzh al leviour Allende, evitañ da vezañ bet dilennet gant un droderonn hepken eus ar boblañs, d'en em gavout gant ur parlamant enebet outañ ha dreist-holl (ha kement-se zo da c'houverkañ) e penn ur c'hengevredad a strolladoù disheñvel-meurbet. Kalz aesoc'h e vije bet pep tra evitañ ma vije bet e penn ur strollad unvan ha frammet mat. Er c'hontrol ez eus en Unidad Popular, c'hwec'h strollad, ar strollad sokialour ha dreist-holl ar strollad komunour o vezañ ar re greñvañ. Ret e voe reiñ da bep hini maodiernezhioù ha kargoù e daouarn ar gomunourion, re all e daouarn ar sokialourion, re all e daouarn ar MAPU, hag all... Termenet eo bet ur politikerezh hollek e live ar gouarnamant met pa ziskenner d'al live plus-trek e santer diforc'hioù bras meurbet. Evel-just n'em eus ket gallet merzout kement-se va-unan met ur skouer a roin a seblant din heverk eus tenzoù-spered disheñvel-krenn. Ger-stur ar yaouankizoù komunour, a weler e pep lec'h war vegerioù Chile, zo : "Luchar, trabajar y estudiar" "Luchar, trábajañ y estudiar para la patria y la revolucion" (stourm, labourat ha studiañ evit ar vro hag ar Reveulzi). Ez c'hontrol ez eo ger-stur ar gleizourion " Ocupar, expropiar, avanzar" (aloubiñ, diberc'hennañ, mont war rack) ha ganto e vez aloubet atantoù, tiez prevez, embregerezhioù hep ma kredfe ar polis emellout ha daoust ma n'eo ket kement-se e frammlabour ar gouarnamant a fell dezhañ chom el lezannegezh. Muioc'h a zroug a zegas kement-se eget a vad ha kreskiñ a ra nec'h ar boblañs dirak seurt oberoù na vezont ket reolet gant ar gouarnamant (ur c'henwerzhour bihan en deus displeget din e oa armet evel meur a hini all evit en em zifenn diouzh ret).

+++++

## K L O Z A D U R

Evel e Bro-C'hall abaoe 1968 e vez rebechet ouzh ar gomunourion gorrekaat ha zoken mougañ stourmusted hag emdarzhegezh dispac'hel ar werin war zigarez startaat gounidoù ar bobl. Pouezañ a ra kalz ar strollad komunour chileat war ar gouarnamant evit ma ne dorro ket an darempredoù gant ar strollad demokratel-kristen hag evit ma klasko kaout e asant diwar-benn ar c'hempennoù pennañ. N'eo ket evit gouzañv kement-se ar strolladoù all eus an "Unidad Popular" a gav dezho n'eus netra da denañ diouzh kilstourmerion ar strollad demokratel-kristen abaoe kimiad an elfennoù araokaour, ar MAPU da gentañ hag an Izquierda cristiana da heul. Poellek tre e seblant din bezañ emzalc'h ar gomunourion. Gouzout a reont mat n'eo ket deuet c'hoazh ar mare da sevel diktatouriezh ar werin e Chile ; a-enep e vefe an darn-vrasañ eus ar boblañs ha ret eo ivez gortoz kaout ur polis hag un arme leal ouzh mennadoù an demokratelezh. Pell emañ an arme ruz hag an Unaniezh soviedel ha ret e vo marteze daskoriñ ar galloud d'ar strolladoù bourc'hizel e 1976. Setu perak e fell dezho chom e framm al lezennoù ha kas da benn tamm ha tamm treuzfurmadurioù er gevredigezh (evel adaoz ar gladoù, stadeladur ur bern embregerezhioù h.a.) a chomo gant n'eus forzh peseurt gouarnamant. Ouzhpenn-se e tennont o mad eus ar prantad-mañ evit astenn o galloud er vro, er skolioù-meur dreist-holl met ivez er polis, en arme, er melestrevezh dre vras dre lakaat izili ar strollad da gemer beli enno. Klask a reont ivez diázezañ o nerzh war dachenn ar c'helaouiñ oc'h adprenañ kelaouennoù ha skingomzvaoù. Ar strollad komunour an hini eo, d'am meno, a denno ar brasañ gounid eus ar prantad-mañ.

Er c'hontrol e tiskouez ar gleizourion, ar M.I.R. ("Movimiento de la Izquierda revolucionaria" 'Emsav an tu-kleiz dispac'hel) ha kristenion an tu-kleiz kaout mall bras da vont war-raok hep derc'hel kont eus stad wirion an nerzhoù e Chile (heñvel eo o emzalc'h ouzh hini ar gleizourion a grede e oa tu da gas da benn ur reveulzi e Bro-C'hall e 1968!) Ur politikerezh dañjerus, da skouer, a ren ar maodiern Jacques Chonchol (MAPU) war dachenn

ar gounezerezh, o tiberc'henna didruez hag hep bezañ diogelet un diazez bennak d'ar gounezerezh a-stroll. Diberc'hennet ha stadelaet eo bet dija 48% eus ar gladoù hiziv ; 25% all a zo gladoù dindan 40 hektar ha 27% a zo etre 40 ha 80 hektar a zo ivez war var da vezañ stadelaet ivez. Droch ha direizh eo rak ur c'houer gant 60 hektar n'eo ket ur gourferc'henn. Er c'hontrol ez eo 80 hektar hervez arbennigourion meur a vro ar vent izelañ evit atantoù splotus. Direizh eo dreist-holl e Chile evit douaroù ar Su a zo bet trevekaet abaoe nebeut amzer, peurliesañ dindan ampegadoù diaes tre, gant promesa ar gouarnamant e vefent perc'henned eus an douaroù-se (ha n'eus nemet ur c'hard eus an diriegezh aradus a vez gounezet betek hiziv!)

Ouzhpenn-se ne dalv da netra stadelaat an atantoù bras evit o reiñ da c'hounit da gouerion baour ha dizesk ma ne vezont ket skoazellet gant ar gouarnamant a roio dezho hadoù, ardivinkoù ha dreist-holl ur skoazell kalvezel evit displegañ dezho pezh a zle bezañ graet, perak, penaos, ha penaos labourat a-stroll e kevelourioù. Er c'hontrol ez eo chomet an dud-se o unan ha lazhet o deus, da skouer, ul lodenn eus ar chatal en ur lakaat en arvar dazont ar c'henderc'h kig ha laezh.

Ar pep noazusañ ouzh ar gouarnamant a seblant din bezañ an aergelc'h a ren e-touez ar werin abaoe trec'h an Unidad Popular. Lavaret hag adlavaret eo bet d'ar vicherourion ha d'an holl dud paour e-pad bloavezhioù ha bloavezhioù e teue o faourentez eus korvoidigezh Chile gant ar c'hevredadoù norzhamerikat, eus korvoidigezh ar werin gant ar vourc'hizion hag ar vistri-labour kevalour, kenwaleerion an impalaerelourion ha kement a frazennoù seurt se ma kav dezho hiziv e vint ken pinvidik hag ar vistri o deus lakaet er-maez, ma c'hortozont burzhudoù eus trec'h an tu kleiz ha ma kav da galz tud n'eo ket mui dav labourat kement ha da vare ar gorvoidigezh kevalour. Ar pep gwashañ eo kement-se d'ar c'houlz dres ma fell d'ar gouarnamant kas war-raok greanteladur ha diorreadur armerzh ar vro. Klask a ra ar gouarnamant broudañ an "trabajo voluntario" ("Labour emyouplek" ha n'eo ket gopret) met ne ra ket berzh e-touez ar vicherourion, - e-touez ar yaouankiz

ne lavaran ket. Hiziv ne gompren ket al labourerion chileat :  
ur gouranamant sokialour o deus ha goulennet e vez diganto  
labourat muioc'h eget a-raok tra ma welont o barr-bevañ hag o  
barr-prenañ o koazhañ. Ar renkadoù-etre a ya d'ober ar pep brasañ  
eus poblañs Chile (gwan int, er c'hontrol, e broioù all Latinamerika,  
da skouer) a zo gwall enkrezet hiziv gant oberoù feuls hag amreol  
ar gleizourion ha kounnaret dreist-holl gant saviad an armerzh.  
Goude maz eo bet techet darn anezho da strolladoù an tu-kleiz e  
1970 emañ ar renkadoù-etre-se o tistreiñ d'ar C'hreiz ha zoken  
d'an tu-dehoù. Seizh mizvezh a dremenno c'hoazh a-raok dilennadegoù  
1973. Gant e faziou hag e zemagogiezh en deus gouarnamant an  
Unidad Popular lakaet en arvar pezh a oa un taol-arnod talvoudus  
kenañ evit Latinamerika a-bezh. O kenderc'hel war an hent-se e  
c'hellfe divrudañ evit meur a vloaz ar mennoziou sokialour e  
kalonoù Chileiz, daoust d'an holl gempennoù araogus en deus  
sevenet abaoe miz Du 1970. A-greiz kalon e hetan ma vo tennet  
kentel eus an diesterioù a vremañ, evit ma c'hellfe kenderc'hel  
an taolarnod-mañ evit diazezañ ar sokialouriezh er frankiz. Ur  
bobl blijus kenañ eo Chileiz ha gouest e tlefe bezañ ar bobl-se  
da drec'hiñ an isdiorreadur, ur wech torret chadennoù ar  
gavalaouriezh sokialour hag ar sujedigezh armerzhel...

B.AN N.

=====

Stagadenn. I. Evit advevañ mizvezh kentañ an taol-arnod chileat e  
c'heller gwelout daou film politikel dudius tre (a-du gant an Unidad  
Popular) : EL PRIMER AÑO ("Ar bloavezh kentañ") ha DIALOGOS DE LAS  
AMERICAS ("kendiviz an Amerikaoù, e ser beaj Fidel Castro e Chile).

II. Un nebeut devoudoù a-zivout ar c'houevr.

E 1970 en deus kenderc'hel Chile 685 000 tonenn gouevr. Pevare  
kenderc'her ar bed eo, goude ar Stadoù-Unanet, an Unaniezh Soviedel  
ha Zambia. An eil ezporzhier-bed eo goude Zambia. Degas a ra an  
ezporzhiadoù kouevr 800 000 milion dolar da Chile (tost da 80% eus  
an holl ezporzhiadoù). Implijet e vez 25 000 de war-eeun gant  
ijinerezh ar c'houevr ha miliadoù all en un doare hanterat.  
Gweleadoù kouevr Chile (92 milion tonenn) a zo ar re vrasañ eus ar  
bed.

+++++

Liesskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50 015 Ar merour : Y. Ollivier